

## Kabell naturel

*A partir de 3 ans*

*Dans un espace naturel*

*Apprentissages : créativité, imagination, concentration et curiosité, motricité fine activité physique, communication, estime de soi, utilisation de ses sens.*

An dafar :

-bandennoù kartoñs gwenn ha liv ( ledander: etre 7.5 sm ha 10 sm) hir a-walc'h evit ober tro penn ar bugel.

-sizailhoù

-paper pegus an daou du

-paper pegus (scotch)

-klochederz

Aozañ (er goudor):

Bep hini a zibab ur vandenn kartoñs .

Ober tro ar penn gantañ ha didroc'hañ ma eo re hir (soñjal laosk un tamm da marc'hañ al lostoù).

Pegañ an tamm paper pegus an daou du e kreizh ar vandenn kartoñs.

Kinnig ar raktres:

Sellout poltriji eus kabelleù disheñvel.

Kinnig d'ar vugale sevel o hini gant ar pezh a vo kavet er c'hoad. Ijinañ asambles petra vefe posubl lakaad ouzh ar c'habell (delioù, brañkoù bihan, bleunioù, geotenn, pluennoù...)

!! Un dra a-bouezh : doujañ d'an natur : arabat terriñ, distrujañ... dastum ar pezh a zo war an douar.

Urzh labour:

Emaomp o vont betek ar c'hoad. Nemet pa vimp engavet enno e vo posubl kregiñ dastum traoù.

Prest oc'h? ... deomp er c'hoad

Ober

Pa omp engavet, goulenn gant ar vugale adispleg ar pezh vo graet ganto, ar raktres.

Pa eo komprenet mat, tennañ an eil paper war ar paper pegus daou du ha laosk anezho klask an traoù, pegañ. War dro 15 minutenn.

Evit echuiñ, staga ar c'abell war penn bep hini (gant ar c'hlocherez pe paper pegus daou du).

Mont en-dro betek ar sal klas ha sellout ouzh ar c'habelleù. Petra a blij ar muiañ dit ?









